




KENVREURIEZ AR BREZONEG

~ N^o 40 ~

KATEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG.

Taolenn an niverenn 40:

1) Respont d'an Aotrou Person.

2) Eil bedenn-veur evid ar vugale.

p.1

3) Trede bedenn-veur evid ar vugale.

p.5

4) AR VADIZIANT:

a) RANN I a -Lidou an digemer

p.10

b) RANN II -Lid ar Skritur Sakr

p.11

gand Pedenn ar Gristenien

p.11

c) RANN III -Lid ar Zakramant.

p.12

d) RANN Diweza-

p.17

5) STAGADENN:

a) Pedenn ar Gristenien.

p.20

b) Benniga en dour-badez.

p.21

c) Pennadou euz ar Skritur-Zakr

p.24

Evid kement-tra a zell ouz "Kenvreuriez ar Brezoneg"

(Koum. 25 lur), her

goulenn digand an:

Ao. Job SEITE, Skol. an Aod, 29249-GUISSENY

CCP. 1738-66 Rennes.

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

1°) Levr Overenn

gand eur golo ler drevezet: 50 lur

gand eur golo plastik: 36 lur

gand eur golo paper kalet: 32 lur

+ mizou kas.

2°) "Komz Doue en overenn" Levr T

....30 lur

3°) "Komz Doue en overenn" Levr A,B,C

pebhini 20 lur.

4°) Ar briedelez

3 lur.

5°) An Nouenn:

8 lur

6°) Cantiques bretons du Diocèse de Quimper et de Léon. 35 lur.

7°) KKroaziou Keltieg (Bleun Brug) 3 lur + mizou kas.

TROIDIGEZHIOU Aotreet da arnod evid an eskobti a-berz an Ao.F.BARBU, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 19 a viz meurzh 1976.
Visant FAYE, Eskob-Skoazeller.

RESPONT d'AN AOTROU PERSON.....

Aotrou Person,

Bennoz Doue deoh evid ho lizer ken hegared. Eet e vefen beteg ennoh med a-benn ar fin e teu din distripa êsoh va soñj dre skrid eged dre veg, dreist-oll pa vez pennoù braz dirazon; gouzoud a rit on bet e skolaj Lesneven, med n'on ket eet beteg penn.

Me a garfe beza bet war al leh da geñver ar vodadenn ho-peus bet; meur a dra a zo bet lavaret ha n'emaon ket akord ganto.

-Folkloraj ! a livirit, ober implij euz ar yez a vez klevet bemdez etouez an dud. Folkloraj an overenn a vez lidet beb bloaz e brezoneg e Iliz-Veur ar Rozera, e Lourd, hag a zach kemend all a dud ? N'emaoh ket mad ! Ar pezh a zo sur eo n'ema ket renerien ar pirhirinaj er soñj-se ha ne houzanv fent ket seurt komzou. Folkloraj an overenn bet kanet e brezoneg, e parrez Kleder gand gouel Maria Hanter Eost (1975) gand pemp eskob hag eun tregont bennag a veleien, dirag eun ilizad tud o pedi hag o kana ? Marteze ho peus klevet anezi er radio...eun dudi e oa. Folkloraj, ya, ma vefe lavaret an overenn e brezoneg dirag tud ha n'ouzon ket a brezoneg....

-"Dond war a-dreñv". Gwir e vefe kement-se ma vefe klasket mouga ar galleg e Breiz. Eur poent 'zo bet ne ouie ket ar Vretoned kalz a halleg. Ne gredan ket e ve den hag a garfe distrei d'an amzer-se. Deski galleg a zo bet evr gounid braz evid ar Vretoned. Ne fell ket deom e vefe Breiz eur vro ma teufe enni diavêzidi ar heriou da weled eur boblad tud diwarlerhiet...ha beh d'al lushskeudennou!

Delher mad d'ar brezoneg ha deski galleg mad (pe zaoneg pe...) n'eo ket dond war a-dreñv eo, med mond war araog ! Muioh-mui e soñj an dud, en on amzer, e rank eun den seven kompren ha komz diou yez d'an nebeuta.

N'emaon ket a-eneb ar galleg en ilizou, a-du krenn emaon zoken evid ma vefe dalhet kont euz an dud a zo en iliz, euz ar re ne ouzon nemed galleg (bugale, yaouankizou, diavêzidi) hag euz ar re daoust ma ouezont brezoneg, a gav gwelloc'h pedi e galleg ha selaou prezegennoù e galleg.

Nemed e kavan ez eur eet re vuan ha re grenn euz ar "brezoneg nemedken" d'ar "galleg nemedken". Gwelloc'h e vefe bet d'am soñj delher kont ivez euz ar re n'int ket maout war ar galleg pe a gav gwelloc'h ar brezoneg daoust dezo gouzoud ar galleg. Ni, war ar mêt; Aotrou Person, a oar e ranker mond dre-zil ha n'eo ket a grenn; sachit a-varo war eur gordenn, ne dorro ket; grit avad eur frappad krenn, draillet e vo ar gordenn.

D'am soñj e vefe mad kaoud tri seurt overennoù: overennoù e galleg penn da benn evel just, overennoù all kemmesket enno ar galleg hag ar brezoneg hervez an dud a vefe en overenn hag eur wech an amzer, overenn e brezoneg penn-da-benn.

Awalh evid hirio, Aotrou Person, ne fell ket din klavared toud deoh dioustu, me ivez a fell din mond deoh dre-zil.

Kenavo, Aotrou Person, gand va brasa doujañs.

Fanch.

PEDENNOU MEUR,
d'an OVERENNOU EVID AR VUGALE. (1)

-2-

An Aotrou Doue ganeoh
ha gand ho spered.

Or halon d'an uhel
Savet eo warzu Doue.

Lavarom bennoz da Zoue on Aotrou
Just ha Santel eo !

Ya, Tad karantezuz meurbed,
setu roet deom al levenez
da ziskouez deoh anaoudegez vad
ha da gana a-unan gand Jezuz:

MEULEUDI DEOH !
BRAZ EO HO KARANTEZ EVIDOM !

Ken braz eo ho karantez evidom
m'ho-peus krouet evidom
ar bed-mañ, braz ha kaer!
MEULEUDI DEOH !
BRAZ EO HO KARANTEZ EVIDOM !

Ken braz eo ho karantez evidom,
ma roit deom ho mab Jezuz,
evid or ren davedoh.

MEULEUDI DEOH !
BRAZ EO HO KARANTEZ EVIDOM !

Ken braz eo ho karantez evidom
ma teuit d'or boda ennañ
evel bugale euz ar memez famill.

(1) En niverenn 37 euz ar "Haierou" on-eus roet ar bedenn genta. Amañ e vo kavet an eil hag an drede.

MEULEUDI DEOH !

BRAZ EO HO KARANTEZ EVIDOM !

Evid kement-se a garantez

e lavarom deoh bennoz ha trugarez,

o kana gand an êlez hag ar zent

a zo ouz hoh adori en neñvou?

SANTEL ! SANTEL ! SANTEL !

AN AOTROU DOUE, MESTR AR BED !

LEUN EO GAND HO KLOAR AN NEÑV HAG AN DOUAR !

HOZANNA E BARR AN NEÑVOU ! (2)

BENNIGET AN HINI A ZEU EN ANO DOUE

HOZANNA E BARR AN NEÑVOU.

Ya, ra vo benniget Jezuz,

an hini ho-peus digaset deom,

mignon ar re vian hag ar re baour.

Deuet eo da ziskouez deom

penaoz e hellom ho kared,

hag en em gared kenetrezom.

Deuet eo da zilam euz kalon an dud

an droug a vir outo d'en em gared

hag ar gasoni a vir outo da veza eüruz.

Prometeet e-neus e vefe ar Spered Santel

ganeom bemdez.

evid ober deom beva euz ho puez.

BENNIGET AN HINI A ZEU EN ANO AN AOTROU

HOZANNA E BARR AN NEÑVOU !

Aotrou Doue, on Tad,

ho pedi a reom da gas ho spered

evid ma teuy ar bara hag ar gwin-mañ

da veza korv ha gwad Jezuz Krist, on Aotrou.

D'an devez araog e basion

e-neus Jezuz diskouezet deom

ho karantez heb muzul:

Ouz taol edo gand e ziskibien,

kemer a reas bara

ha goude eur bedenn a drugarez

e torras ar bara, hag hen roas d'e ziskibien

en eur lavared:

Kemerit ha debrit euz hemañ

Rag va horv eo, roet evidoh!

JEZUZ KRIST KASET D'AR MARO EVIDOM !

Evelse ivez e kemeras eur halirad gwin;

dre eur bedenn e rentas deoh bennoz ha trugarez,

hag e roas ar halir d'e vignoned en eur lavared:

Kemerit oll hag evit euz ar halirad-mañ,

rag va gwad eo,

gwad an emgleo nevez ha peurbaduz

a vo skuillet evidoh hag evid an oll dud

da bardoni ar pehejou.

JEZUZ KRIST KASET D'AR MARO EVIDOM !

Goude-ze e lavaras dezo:

C'hwi 'raio kement-mañ

gand ar zoñj ahanon.

Digas a reom eta da zoñj,

Tad karantezuz meurbed.

euz maro Jezuz, salver ar bed

hag euz e adsao da veo.

En em lakeet e-neus etre on daouarn,

ni a ginnigo anezañ deoh e sakrifiz,

hag Eñ a zacho ahanom davedoh.

MEULEUDI HA GLOAR DA ZOUE ON AOTROU !

BEZIT MEULET HA TRUGAREKEET !

BEZIT ENORET HA BENNIGET !

Selaouit or pedenn, Aotrou Doue:

roit ho spered a garantez,

d'ar re oll a gemer perz er pred-mañ;

Ra vezint muioh-mui en hoh Iliz.

gand on Tad Santel ar Pab,

an Aotrou 'n Eskob, an oll eskibien,

ha kement hini a labour evid ho pobl santel

RA VEZINT EUR HORV HEBKEN EVID HO KLOAR !

Bezit soñj euz ar re a garom,

hag euz ar re na garom ket a-walh.

Bezit soñj euz an dud tremenet

grit digemer vad dezo en ho paradoz !

RA VEZINT EUR HORV HEBKEN EVID HO KLOAR !

Deuit d'or boda, eun deiz en ho kichen

asamblez gant ar Werhez Vari,

mamm da Zoue hag or Mamm,

evid gouel braz ar baradoz en ho rouantelez.

Neuze, oll vignoned Jezuz Krist, on Aotrou,

a gano deoh da virviken.

RA VEZINT EUR HORV HEBKEN EVID HO KLOAR !

ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Drezañ ha gantañ hag ennañ

deoh-hwi ,Doue an Tad oll-halloudeg

a-unan gand ar Spered Glan

peb gloar ha peb enor

a-oll-viskoaz da virviken! Amen !

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halir en eur lavared:

An Aotrou Doue ganeoh,
ha gand ho spered.

Or halon d'an uhel,
savet eo warzu Doue.

Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou.
Just ha santel eo !

Aotrou Doue, deoh bennoz ha trugarez:

A-War ar bloaz:

(1)

C'hwi eo ho-peus or hrouet
c'hwi a halv ahanom da veva evidoh
ha d'en em gared an eil egile.

A drugarez deoh
ni a hell en em weled hag en em gleved etrezom
kemer perz an eil hag egile
e joa e trubuill peb hini ahanom.

Ablamour da-ze, Aotrou Doue, on Tad,
or halon leun a joa hag a anaoudegez vad,
a-unan gand ar re oll a gred ennoh,
gand ar zent hag an êlez ivez,
e kanom laouen deoh meuleudi.

SANTEL ! SANTEL ! SANTEL !

(2)

AN ACTROU DOUE MESTR AR BED,
LEUN EO . GAND HO KLOAR AN NENV HAG AN DOUAR !
HOZANNA E BARR AN NENVOU !
BENNIGET AN HINI A ZEU EN ANO DOUE !
HOZANNA E BARR AN NENVOU !

Ya, Aotrou Doue, c'hwi 'zo santel,
c'hwi 'zo madelezuz evidom,
c'hwi 'zo mad e-keñver an oll.

Bennoz a lavarom deoh,
ha dreist-oll ablamour d'ho Mab Jezuz Krist.

(1) Er fin e vo kavet A.B.C evid an amzer -fask

(2) Marrec 1975 p.107

Deuet eo war an douar

e -touez an dud hag o-deus troet kein deoh
ha n'hellont ket en em gleved etrezo.

Dre ar Spered Santel

e tigor deom on daoulagad hag on diskouarn,
dond a ra da jeñch or halon:
ha neuze e teuom d'en em gared,
ha da weled sklêr ez oh, c'hwi, on Tad,
ha, ni, ho pugale.

Jezuz, an Aotrou Krist,

a zeu d'or boda bremañ endro d'ar memez taol,
deom-ni da ober ar pezh e-neus greet
eñ e-unan gwechall.

Tad mad meurbed, plijet ganeoh santellaad

ar bara hag ar gwin-mañ;
evid ma teuint da veza evidom
korv ha gwad Jezuz ho Mab.
Lavared e-neus deom ober d'on tro
ar pezh e-neus greet e-unan
d'an deiz araog e basion.

Epad ar goan ziweza gand e ziskibien,

Jezuz a gemeras bara,
goude beza rentet gloar deoh bennoz ha trugarez,
e torras ar bara hag hen roas d'e vignoned,
en eur lavared:

Kemerit oll hag debrit euz hemañ,

rag, va horv eo, roet evidoh."

Evelse ivez, e kemeras ar halirad gwin,

e rentas deoh bennoz ha trugarez,
hag hen roas d'e vignoned,
en eur lavared:

"Kemerit oll hag evit euz ar halirad-mañ,

rag va gwad eo,
gwad an emgleo nevez ha peurbaduz,
a vo skuillet evidoh hag evid an oll dud
da bardoni ar pehejou..."

Setu perag emaom amañ

hodet dirazoh, Doue on Tad,
gand ar zoñj
euz kement e-neus greet Jezuz evid or zavetei.

Er zakrifis santel-mañ

fiziet gantañ en e Iliz,

e lidom e varo hag e adsao da veo.

Tad euz an neñv

plijet ganeoh on digemer

a-unan gand ho Mab-muñ-karet.

Tellet eo bet da Jezuz gouzañv evidom,

ha c'hwi ho-peus e adsavet da veo;

rag-se e kanom deoh meuleudi:

MEULEUDI HA GLOAR DA ZOUE, ON AOTROU !

BEZIT MEULET HA TRUGAREKEET !

BEZIT ENORET HA BENNIGET !

Ganeoh ema o veva en ho paradoz,

med ganeom-ni ivez

ema o chom war an douar.

MEULEUDI HA GLOAR DA ZOUE, ON AOTROU !

BEZIT MEULET HA TRUGAREKEET !

BEZIT ENORET HA BENNIGET !

Da fin ar bed e tistroio, leun a hloar,

hag en e rouantelez ne vezo, e touez an dud

na kleñved na tristidigez, na trubuilh.

MEULEUDI HA GLOAR DA ZOUE, ON AOTROU !

BEZIT MEULET HA TRUGAREKEET !

BEZIT ENORET HA BENNIGET !

Tad Santel, galvet ho-peus ahanom

da zond e levenez ar Spered Santel,

da reseo ouz an daol-mañ

korv ha gwad or Zalver:

Pa vezim kennerzet dre ar gomunion-mañ,

roit deom, ni ho ped,

ar hras da veva evel Jezuz

ha da blijoud deoh muioh-mui.

Bezit soñj, Aotrou Doue,

euz on Tad Santel Ar Pab,

euz an Aotrou 'n Eskob,

hag euz an oll eskibien.

C-WAR AR BLOAZ:

Sikourit oll ziskibien an Aotrou Krist,
da lakaad ar peoh da ren,
ha da skigna o levenez kristen endro dezo.

Roit deom oll ar hras
da vond, eun deiz en ho kichen,
asamblez gand ar werhez Vari, mamm Doue,
hag an oll zent euz ar baradoz
oll unanet en Aotrou Krist.

Ar beleg a zav ar pladig hag ar halin en eur lavared:

Drezañ hag ennañ ha gantañ
deoh-c'hwi, Doue an Tad oll-halloudeg
a-unan gand ar Spered-Glan
peb gloar ha peb enor
a oll-viskoaz da virviken.

x
x x
x

E-Pad an AMZER-FASK:

Ⓐ-Rag c'hwi a blij deoh ar vuez,
or galvet ho-peus da vev
ha c'hwi a fell deoh e vem eüruz da viken.

Jezuz eo ar henta den
ho-peus adsavet a-douez ar re varo
ha roet dezañ eur vuez nevez.

Ar vuez-se a zo ennom ivez
abaoe ar vadiziant:
ha gouzoud a reom
eh adsavim ivez eveldeñ, en ho kichen
neuze ne vo mui a varo
n'or bezo mui da houzañv.

Ⓑ-Deuet eo eñ

da zigas deom kelou mad ar vuez
ez om galvet da ren en ho kichen,
e splannder ho kloar da virviken.

Diskouezet e-neus deom ivez
an hent a gas d'ar gwir-vuez-se:

kaoud karantez an eil evid egile.

Kemeret e-neus an hent-se en or raog.

©-Grit ma resevo ar gristenien

levenez Pask leiz o halon,

ha ma skuillint al levenez-se

e kalon ar re n'ouzont ket c'hoaz

eo savet Jezuz a varo da veo.

x

x

x

AR VADIZIANT ROET D'EUR HROUADUR. (2)

Ar zul eo an deiz a zigouez ar gwe'la evid ober eur vadiziant, rag da zul eo, dreist an deizioù all, e lid an Iliz santel mister Pask Or Zalver, da lavared eo e varo war ar groaz hag e adsao a-douez ar re varo, ha diwar ar mister-se e teu d'ar gristenien ar vuez nevez a resevont er vadiziant.

Digouezoud a ra ivez ober war-eun-dro badiziant an oll vugale nevez-ganet, e-leh ober meur a vadiziant er memez dervez, gand peb famill d'he zro. Rag an Iliz a zo famill vraz ar gristenien, ha peb krouadur a vo, er vadiziant, unanet gand ar memez Aotrou Krist.

Eun dra gaer eo lida sakramant ar vadiziant dirag pobl an dud fidel, da vianna ar gerent tosta, mignoned hag amezeien. Bez'e heller zoken ober er vadiziant dirag ar barrez a-bez bodet en iliz, e kerz an overenn zul. Med abegou mad a beb seurd a vo alies evid kaoud nebeutoh a dud.

D'an tad ha d'ar vamm, gand an tad-paeron hag e vaeronez en o kichen, e tigouez an enor da ginnig o hrouadur da veza badezet.

Ar beleg, gwisket gantañ ar zae wenn (pe ar zourpiliz) hag ar stolenn, a ya warzu an nor-dal, pe eul leh all euz an iliz, da ziembroug an tad, ar vamm, hag ar re all a zo en-dro d'ar hrouadur. Epad m'ema ar beleg o treuzi an iliz, ar gristenien all a zo en iliz o-deus tro da gana eur hantik.

(2) El levrig-mañ e vo ano euz badiziant eur hrouadur hebken.

An niverennoù laket en tu kleiz d'ar bajenn a vo an heveleb re hag er Ritual galleg.

(1) Troet e brezoneg diwar ar ritual latin (Rom, 1969)

x
x x x
x x x x x

RANN GENTA. / LIDOU AN DIGEMER.

1-Komzou kenta ar beleg:

Saludi a ra an dud deuet d'ar vadiziant, hag ispisial tad ha mamm ar hrouadur, an tad-paeron hag e vaeronez. (Hen ober a raio en eur zerhel kont euz an anaoudegez e-neus euz an dud.)

E berr gomzou, e hell d'igas da zoñj euz al levenez a garg kalon ar gerent pa'z eo deut dezo o hrouadur, evel eun donezon digand Doue. Krouer ha mammenn peb buez, emañ Doue, dre ar vadiziant, o vond da rei d'ar hrouadur e vuez e-unan.

2-Ar beleg d'an tad ha d'ar vamm da genta, d'ar paeron ha d'ar vaeronez da houde:

(ar homzou roet amañ a hell beza cheñchet)

Y. Pe ano a roit d'ho krouadur ?

R.A.

Y. Petra houlennit digand an Iliz evid A. ?

R. Ar Vadiziant. (pe: ar feiz. -Gras an Aotrou Doue. pe: ar vuez peurbaduz; pe: beza digemeret en Iliz...etc...)

Y. Peogwir e houlennit ar vadiziant evid ho krouadur, c'hwi ho pezo da zigeri e spered da sklerijenn ar feiz, evid ma tesko, e skol Or Zalver, kared Doue hag an nesa. Ha soñjet ho peus mad e kement-se ?

R.Ya. (ha gand gras Doue e raïm on dever.)

Y. Ha c'hwi, tad-paeron ha maeronez, ha bez'oh prest da zikour tad ha mamm ar hrouadur evid kement-se ?

R.Ya.

3-Sin ar groaz:

ar beleg: A., an Iliz, famill ar gristenien, a ra digemer laouen dit. En heh ano, e verkan ahanout gand sin ar groaz, a zo merk Or Zalver Jezuz Krist ha merk ar hristen.

C'hwi ivez, e dad hag e vamm, tad-paeron ha maeronez, grit war e dal sin ar groaz.

-.-. Echui lid an digemer, e lavar ar beleg d'ar re 'zo en-dro d'ar hrouadur kemer o flas evid lid ar Skritur Zakr. Ma vez tro, ober eur brosesion en eur gana eur salm, pe eur hantik.

==..==..==..==..==..==..==..==..==..==

EIL RANN

Lid AR SKRITUR ZAKR (Ar pennadoù da lenn a vo kavet pelloc'h)

-.-. Eur pennad d'an nebeuta a vo lennet, ha bez'e heller kemer daou pe dri, e-touez ar re'zo merket. Etre ar pennadoù-lenn, e vo tu da gana eur salm diskanet, da skouer an hini 22, pe 26 pe 33

Ma vez epad overenn zul, e lenner pennadoù ar zulvez-se, nemed abegoù mad a vefe evid dibaba re ar vadiziant, pe unan anezo.

-.-. Eur brezegenn verr a zisplego ar pezh a vo bet lennet hag a zikouro an dud da gompren gwelloc'h talvoudegezh ar vadiziant ha da startad o bolontez da veza gwir gristenien.

Mad eo mired predigou amzer da jom sioul war-lerh ar brezegenn, pe war-lerh pedenn ar gristenien, pe e-kreiz ar bedenn-mañ, da beb-hini da bedi e diabarzh e galon.

7- Pedenn ar Gristenien: (War batrom al Litanioù, da bedi Or Zalver da genta, hag ar Zent da houde.)

Ar beleg: Va breudeur ker, evid ar hrouadur a vo roet dezañ bremaig gras ar vadiziant, evid e dad hag e vamm, e baeron hag e vaeronez, hag evid an oll dud vadezet, pedom Or Zalver Jezuz Krist.

Diskan: Salver madelezuz, selaouit or pedenn! (pe unan all)

Al lenner: 1. Salver Jezuz, prenet ho-peus an dud o vervel war ar groaz hag o sevel beo euz ar bez; plijet ganeoh rei buez nevez ar vadiziant d'ar hrouadur-mañ hag e zigemer en hoh Iliz Santel:

R. Diskan: Salver madelezuz.....

2. Dre ar vadiziant hag ar gonfirmasion, grit ma vo deoh eun diskibl leun a feiz ha ma roio testeni euz hoh Aviel:

3. Roit dezañ grasou a zantelezh, 'hed e vuez penn-da-benn, beteg eürus-ted ar baradoz.

4. Sikourit e dad hag e vamm, e baeron hag e vaeronez, da zevel ar hrouadur-mañ e sklerijenn ar feiz, ha dalit bepred e famill en ho karantezh.

5.E peb-hini ahanom lakit gras ar vadiziant da veza beo ha da vleunia
ken kaer hag en deiz kenta:

℟.Salver madelezuz, selaouit or pedenn !

8-	Santez Mari, Mamm da Zoue:	℟.Pedit evidom !
	Sant Josef, Tad Mager da Jezuz.	℟....
	Sant Yann Vadezour.	℟....
	SantPer ha Sant Paol.	℟....
	Sant A., (patron-ez ar bugel)	℟....
	Oll zent ha Sentezed Doue.	℟....

9.Ar beleg ,da gloza, a lavar unan euz an diou bedenn-mañ:

a) Doue oll-halloudeg ha peurbadel, ho Mab ho-peus kaset er bed
evid argas pell diouzom galloud Satan, spered an droug,
hag evid rei d'an den, tennet euz an deñvalijenn,
dor zigor da vond e rouantelez kaer ho sklerijenn.
A greiz or halon e pedom ahanoh evid ar hrouadur-mañ:
grit anezañ , pa vo gwalhet ar pehed orijinel, templ ho santelez
ha demeurañs ho Spered Santel. Dre Jezuz Krist, or Zalver. ℟.AMEN

b)Aotrou Doue oll-halloudeg , ho Mab unganet ho-peus kaset er bed
evid rei d'an den, dalhet gand chadennoù ar pehed,
ar frankiz a zo hini ho pugale.
A galon izel ho pedom evid ar hrouadur-mañ: gouzoud a rit e vo tenfet
gand touellerez ar bed hag e-no da enebi ouz spered an droug; rag-se,dre
vertuz Pasion ho Mab hag e adsaos a varo da veo,
plijet ganeoh e ziframma galloud an deñvalijenn, e gennerza
gand gras Or Zalver hag e ziwall heb ehan 'hed e vuez war an douar.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. ℟.AMEN

10-Ar beleg a hell neuze dibab: pe ober an olevadur war vruched ar hrouadur
pe astenn e zorn warbañ nemedken.

a)Evid an olevadur: "A.,...galloud Jezuz Krist or Zalver da rei nerz dit dre ar
merk a ran warnout gand an oleo santel-mañ, en Aotrou
Krist benniget, Doue beo ha leun a hloar, a-oll-viskoaz
da virviken. ℟.AMEN

b)Evid astenn an "A...,galloud Jezuz Krist or Zalver da rei nerz dit, eñ
dorn; - hag a zo Doue beo ha leun a hloar, a -oll-viskoaz da
virviken. ℟.AMEN

TEIRVED RANN

LID AR ZAKRAMANT:

...Mond a reer neuze daved an dour-badez, da lavared eo: pe e chapel ar Mên-badez,
e trañn pe ouz kostez an iliz, pe c'hoaz tost d'ar heur, pe er heur zoken.

11-Ar beleg, e berr gomzou, a ro ali da bedi startoh, pa'z eo deut koulz ar zakramant. Kemer a hell unan euz an daou zoare lakeet amañ, pe komzou all.

a-Va breudeur, pedom Doue oll-halloudeg, ma plijo gantañ rei largentez d'ar hrouadur-mañ ar vuez nevez a zeu euz ar Spered Santel dre zakramant an dour.

b-Va breudeur, gouzoud a rit penaoz eo bet implijet gand Doue rei perz en e vuez e-unan, dre zakramant an dour, d'ar re a gred ennañ. Savom eta or halonou d'e bedi, evid ma plijo gantañ, euz ar feunteun-vadez a zo amañ, lakad da redeg doue e hras war N..., bet dibabet gand e garantez.

12.-.-. Benniga an dour-badez a zo da ober bremañ, pe, ma'z eo benniget dija, lavared warnañ eur bedenn-drugarekaad. Da lavared eo: en ilizou a zo bet grêt enno nozveziad ar Zul-Fask, an dour-badez benniget neuze a virer, kement ha ma heller, penn-da-benn d'an amzer Fask. Med, en diavêz d'an Amzer Fask, ez eo gwelloc'h benniga an dour-badez evid peb badiziant. Setu perag e kaver amañ, da genta, ar bedenn da venniga an dour (e nozvez ar zul-Fask end-eeun, ha goudeze a-hed ar bloaz, en diavêz d'an amzer Fask), d'an eil, ar bedenn war an dour a zo dija benniget (e-doug an amzer Fask dreist-oll.)

1-DA VENNIGA AN DOUR-BADEZ: (e nozvez ar Zul Fask hag en-diavêz d'an amzer Fask.)

Pedom Doue....

Eo sakramañchou, Aotrou Doue, a zo evidom ar zinou a weler euz an traou burzuduz a rit dre ho kalloud pa na weler ket.

A-hed istor ar zilvidigez, ho-peus grêt, e meur a zoare, implij euz an dour, bet krouet ganeoh, evid diskouez ennañ ar zin euz gras ar vadiziant.

Evelse, Aotrou Doue, kerkent hag er penn kenta euz ar bed, edo ho Spered o plava 'uz d'an dour, evid sila ennañ nerz da rei santelez. Evelse c'hoaz, dre an dour-beuz dirollet war ar bed, ho-peus roet eur zin euz ar vadiziant a ro d'an dud eur vuez nevez; rag an dour-riou braz a ziskouez war-eun-dro e oa echu gand ar pehjou ha diwanet ar vertuziou.

Ha da vugale Abraham, gand Moizez en o fenn, ho-peus greet treuzi ar Mor Ruz eet da zeh, evid diskouez, er bobl diframmet diouz sklavaj ar roue Faraon, eur skeudenn euz ho pobl da zond, hini an dud vadezet.

Hag ho Mab karet, Aotrou Doue, a zo bet badezet gand Yann e dour ar ster Jordan ha sakret gand ar Spered Santel. P'edo stag ouz ar groaz, e-neus lezet dour ha gwad da redeg euz e gostez digor.

Hag erfin, goude ma oa savet a varo da veo, e-neus lavaret d'e ziskibien: "It dre ar bed; digasit an oll boblou d'ar feiz, ouz o badezi en ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel."

Sellit bremañ gand karantez ouz hoh Iliz, ha lakit da darza enni an dour euz mammenn ar Vadiziant.

Ra zeuio en dour-mañ gras or Zalver, ho Mab, dre ar Spered Santel evid ma hello an den, ho-peus ket krouet da denna deoh, beza gwalhet e sakramant ar Vadiziant, euz peb stlabez ar pehed ha reseo, dre an dour hag ar Spered Santel, ar vuez nevez a raio anezañ ho pugel.

Ar beleg a lak e zorn da douch ouz an dour, en eur lavared:

Ho pedi a reom, Aotrou Doue:

dre ho Mab, lakit da ziskenn er feunteuniad dour-mañ nerz ar Spered Santel, evid ma hello kement hini a vo, dre ar Vadiziant, sebet liet er maro a-unan gand Or Zalver, adsevel da veo ivez a-unan gantañ.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

✠.AMEN

2-PEDENN WAR AN DOUR PA'Z EO BENNIGET DIJA (en amzerFask)

Bernoz ha meuleudi deoh, Aotrou Doue, Tad oll-hallowdeg, ho peus krouet an dour evid nêtaad hag evid rei ar vuez:

✠.Meuleudi da Zoue.! (pe eun diskan all)

Bennoz ha meuleudi deoh, Salver Jezuz, Mab karet an Tad ho peus lezet dour ha gvad da redeg euz ho kostez, evid lakaad an Iliz da veza ganet diwar ho maro hag hoh adaao da veo:

✠.Meuleudi da Zoue !

Bennoz ha meuleudi deoh, Spered Santel, on Doue ivez, ho peus sakret ha santelleet Or Zalver pa reseve ar vadiziant e dour ar stêr Yordan, evid ma vijem-ni oll badezet ennoh-c'hwi.

✠.Meuleudi da Zoue !

Aotrou Doue, emañ dirazoh (ar hrouadur-mañ) N...., galvet ganeoh ha douget gand e dud da reseo ar Vadiziant e feiz an Iliz. Plijet ganeoh eta, dre vertuz kuzet an dour santel-mañ, digeri dezañ an nor d'ar vuez nevez a ro ar Spered Santel, evid ma vevo da viken.

✠. AMEN

Doareou all da venniga an dour pe d'ober ar bedenn war an dour bet benniget araog, a vo kavet e dibenn al levrig.

13-KENTel gand ar beleg:

Ouzoh e komzan bremañ adarre, tad ha mamm ar hrouadur-mañ, paeron ha maeronez ivez.

Dre zakramant ar Vadiziant, ho krouadur a vo bremaig ganet d'ar vuez nevez a ziwano ennañ diwar an dour hag ar Spered Santel . Kement-se a vo grêt gand madelez Doue.

Med c'hwi, diouz ho tu, lakit ho poan d'e zevel er feiz kristen, evid ma vo ar vuez divin-se diwallet diouz kontamm ar pehed, ha kresket a zeiz da zeiz.

Neuze 'ta, ma'z oh douget gand ho feiz hoh-unan da respont evitañ, gand ar zoñj euz ho padiziant-c'hwi, ez an da houlenn diganeoh diskleria e fell deoh trei keid d'ar pehed ha lakaad ho feiz e Jezuz Krist, ar feiz a zo hini an Iliz, a vez badezet enni an oll vugale.

14-Evid"trei kein d'an droug", e heller dibaba etre an doare a/ pe b/

a/ Ha trei a rit kein d'ar pehed, evid beva dispeg diouz e liammou,
evel gwir vugale da Zoue ?

℥.Ya !

Ha trei a rit kein da gement a zoug da ober an droug, evid mired
na vefe ar pehed mestr warnoh ?

℥.Ya !

Ha trei a rit kein da Za tan, tad ar pehed, evid heulia Jezuz
Krist ?

℥.Ya !

b/ Ha trei a rit kein da Zatan ? ℥.Ya !

Ha trei a rit kein d'e oll oberou ? ℥.Ya !

Ha trei a rit kein da oll douellou ar bed ? ℥.Ya !

---.Diouztu goude, diskleriadur ar feiz.

15-DISKLERIADUR AR FEIZ:

Ha kredi a rit e Doue an Tad oll-halloudeg,
krouer an neñv hag an douar ? ℥.Ya, (kredi a ran.)

Ha kredi a rit e Jezuz Krist, e Vab unganet, on Aotrou
a zo bet ganet gand ar Werhez Vari,
e-neus gouzanñvet ar maro hag a zo bet laket er bez,
a zo savet a douez ar re varo,
hag a zo azezet en tu dehou d'an Tad ? ℥.Ya !

Ha kredi a rit er Spered Santel, en iliz santel katolik, e komunion
ar Zent, e pardon ar pehejou, en adsao ar re varo da veo,
hag er vuez peurbaduz ?

℥. Ya !

Evid asanti gand an diskleriadur-se, ar beleg hag an dud all'zo en iliz a
lavar asamblez:

Setu or feiz deom oll, setu feiz an Iliz,
a zo stad ennom ouz he diskleria, en Aotrou Krist, or Zalver.

16-AR VADIZIANT: Digouezet e-kichen an dour-badez, ar beleg a ra outo oll
ar goulenn-mañ:

Ha felloud a ra deoh e vefe badezet A..., e feiz an Iliz, ar feiz-se
emaom o paouez diskleria asamblez ?

℥. Ya !

~.~. Ha raktal e ro ar vadiziant d'ar hrouadur:

A...., DA VADEZI A RAN

EN ANO AN TAD (Skuill a ra dour war e benn eur wech,
pe e zouba en dour)

HAG AR MAB (Skuill a ra dour eun eil gwech)

HAG AR SPERED SANTEL. (Skuill a ra dour eun deirved gwech)

17-Olevadur gand Krisma Santel: Ar beleg a lavar goudeze d'ar hrouadur:

An Doue oll-halloudeg, Tad or Zalver Jezuz Krist,
e-neus bremañ tennet diwarnout pouez ar pehed
ha grêt dit beza ganet a-nevez euz an dour hag ar Spered Santel.
Pa'z out digemeret e-touez e bobl santel, Enñ a verk ahanout
gand an oleo sakr, evid ma chomi da viken unanet gand an Aotrou
Krist, beleg, profed ha Roue.

K. AMEN.

~.~. Lakaad a ra ar Hrisma santel war gern penn ar hrouadur.

18-Lid an dillad gwenn: (gwisket d'ar hrouadur gand ar vaeronez pe ar vaeron)

Ar beleg: A..., setu grêt ahanout eur hrouadur ganet a-nevez,
hag an Aotrou Krist a zo da wiskamant;
Kemer eta an dillad gwenn-mañ, evel merk euz da stad a gristen.
Sikourët gand da dud ha da vignoned, dre o homzou hag o
skoueriou,
dalh direbech kaer da enor a gristen beteg ar vuez peurbaduz.

K. AMEN

18 b-Lid ar Goulou: ar beleg a gemer en e zorn ar goulou-Pask war enaou(pe:elum)
hag unan bennag euz ar famill (an tad pe ar paeron, da skouer)
a enaou outañ eur goulou all. Ar beleg a lavar da genta:

A...., resevit sklerijenn an Aotrou Krist.

ha goudeze e lavar d'ar famill:

Ennoh-c'hwi, tad ha mamm ar hrouadur, e baeron hag e vaeronez
eo fiziet ar goulou-mañ, sin euz sklerijenn Or Zalver.
Beillit, ma talho ho krouadur, sklerijennet gand Jezuz Krist,
da gerzoud bepred er vuez evel eur mab a sklerijenn;
ma chom stard er feiz, e hello mond da ziambroug Or Zalver
pa zeuio en e rouantelez, a-unan gand oll Zent ar baradoz.

+++++

19-Dirag an Aoter vraz: Mon a reer neuze e prosesion beteg an Aoter, nemed, evel just, ma'z eo bet badezet er heur. Goulouenn an hini nevez-badezet a zo war enaou, douget gand an tad pe an tad-paeron. E kerz ar brosesion, e kaner eur hantik d'ar vadiziant/

Kentel gand ar beleg (evelhenn, pe gand komzou heñvel):

Va breudeur, ar hrouadur-mañ, ganet d'eur vuez nevez dre ar vadiziant, a zo bremañ e gwirionez bugel da Zoue.

Diwezatoñ, dre ar gonfirmasion, e resevo ar Spered Santel gand e oillzonezonou. Pa zeuio d'an overenn, e kemero perz e sakrifiz Or Zalver hag e pred santel sakramant an Aoter; neuze, e kreiz an Iliz, familh ar gristenien, e lavaro "Tad" d'an Aotrou Doue.

Bremañ, ez eo deom-ni komz evitañ, ni hag a zo dija bugale da Zoue, gand e Spered o veva ennom. Lavarom eta ar bedenn a zo bet desket deom gand or Salver:

-.-. An oll a lavar neuze, pe a gan, ar Bater:

On Tad hag a zo en neñv,
hoh ano bezet santelleet,
ho rouantelez deuet deom,
ho polontez bezet grêt
war an douar evel en neñv.

Roit deom hirio or bara pemdezien:
pardonit deom or pehejou,
evel ma pardonom d'ar re o deus mañket ouzom,
ha n'on lezit ket da goueza en tentadur,
med on diwallit diouz an droug.

20-DA Venniga ar vamm: (gand he hrouadur war he divreh)
an tad ive, hag an dud a zo endro dezo:

-.-. Dibaba unan euz an tri stumm lakeet amañ da heul: A, B, C

Stumm A:

An Doue oll-halloudeg, dre e Vab ganet gand ar Werhez Vari,
a ro d'ar mammou kristen eul levenez seul vrasoh,
ma par dirazo, evid o bugale, an esperañs e vevint da virviken;
plijet gantañ skuill e vennoz war mamm ar hrouadur-mañ.
laouen eo bremañ da veza laketa er bed he bugelig;
ra zalho bepred, hag eñ ganti, da drugarekaad Doue
dre Or Zalver Jezuz Krist.

¶. AMEN

An Doue oll-halloudeg, pa'z eo eñ a ro ar vuez, hini ar bed-mañ
hag hini ar bed all, plijet gantañ benniga tad ar hrouadur-mañ:
dre e gomzou ha dre skoueriou e vuez, ra vo ar henta,
a-unan gand e bried; o kentelia anezañ war ar feiz,
en or Zalver Jezuz Krist.

✠.AMEN

An Doue oll-halloudeg, pa'neus grêt deom, dre an dour hag ar
Spered Santel, beza ganet a-nevez evid ar vuez peurbaduz,
plijet gantañ skuill e vennoz war ar gristenien a zo amañ,
ma vint e peb leh hag e peb amzer izili beo euz e bobl,
en Or Zalver Jezuz Krist.

✠.AMEN

Doue oll-halloudeg d'ho penniga,+
an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel.

✠.AMEN

Stumm B:

An Doue oll-halloudeg, gand ganedigez e Vab deut e-touez an dud,
e-neus karget ar bed a levenez;
plijet gantañ benniga ar hrouadur-mañ nevez badezet,
ma teuo, a-hed e vuez, da denna muioh-mui d'ar Zalver benniget.

✠.AMEN

An Doue oll-halloudeg, pa'z eo eñ a ro ar vuez, hini ar bed-mañ
hag hini ar bed all, plijet gantañ benniga tad ha mamm ar hrouadur-
mañ.
Laouen bremañ gand ar bugelig ganet en o zi,
ra zalhint bepred, hag eñ ganto, da drugarekaad Doue
dre Or Zalver Jezuz Krist.

✠.AMEN

An Doue oll-halloudeg, pa'neus grêt deom, dre an dour hag ar
Spered Santel, beza ganet a-nevez evid ar vuez peurbaduz,
plijet gantañ skuill e vennoz war ar gristenien a zo amañ,
ma vint e peb leh hag e peb amzer izili beo euz e bobl,
en Or Zalver Jezuz Krist.

✠. AMEN

Doue oll-halloudeg d'ho penniga +
an Tad, hag Ar Mab, hag ar Spered Santel.

✠.AMEN

Va breudeur, evidoh oll e houlennom gras ha madelez Doue,
an Tad oll-halloudeg, e Vab karet hag ar Spered Santel.
Bezit 'hed ho puez, miret ha skoazellet gantañ,
ma vo sklerijennet ho hent gand ar feiz, ha ma'z eot erfin
beteg an eürusted prometet, ha ni ganeoh.

It bremañ e peoh Or Zalver.

✠.Bennoz da Zoue !

-.-.Evid kloza mad lidou ar Vadiziant, e heller kana eur hantik da drugarekaad
Doue, da skouer an "Te Deum" pe ar "Magnificat"

-.-.Bez'ez eus ive, e kalz euz or parrezioù, gizioù mad ha n'int merket nag
er ritual Latin, nag en hini galleg. Setu amañ diou anezo:

1)E parrezioù 'zo, ar hristen nevez a vez douget da bokad d'an
aoter, en eur douch an dirag euz an daol-aoter, ar pezh a dalv
da ziskouez ez eo an hini badezet unanet gand An Aotrou Krist, hag
ez eo galvet da zond en-dro evid reseo sakramant an Aoter.

2)Dreist-oll ema ar hiz da ouestlaer hrouadur d'ar Werhez Vari.

An tad hag ar vamm a hell pedi evelhenn:

"Gwerhez Vari, Mamm da Jezuz ha Mamm d'an oll gristenien, dond a
reom da ginnig deoh ar bugelig-mañ, a zo ganet deom dre vadelez
Doue hag a zo bremañ ganet a-nevez dre ar vadiziant. Gand ho kalon
a vamm, beillit warnañ penn-da-benn e vuez, evel m'ho-peus bet
beillet war ho Mabig Jezuz.

"Gouestla 'reom deoh e gorr hag e ene, e vloavezioù kenta, e yaou-
ankiz hag e oll amzer da zond. Roit dezañ yehed ha levenez, spered
digor, bolontez vad ha stard, kalon dener, ene divlamm. Grit dezañ
kreski en oad hag e furnez, dindan bennoz ha skoazell Doue an Tad
e-neus e grouet, ar Mab e-neus e brenet, ar Spered Santel a ra e
zemeurañs ennañ.

"Or zikourit-ni da rei dezañ eur gelennadurezh vad ha d'e heñcha
warzu ar stad a vuez merket dezañ gand Doue; ha goulennit evidom
ar hras da veza, eun deiz, gantañ en ho kichen, e ti on Tad euz an
Neñv. Amen.

an oll:

Me ho salud, Mari, leun a hras, an Aotrou Doue 'zo ganeoh; benniget
oh dreist an oll gwraez, ha benniget eo ar frouez euz ho korr, Jezuz.
Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidom, peherien,
bremañ ha d'an eur euz or maro. Amen.

II

-Ar beleg: Va breudeur kêr, pa'z om bet galvet gand Doue da veza e bobl,
pedom an Tad leun a vadelez evid ar hrouadur a vo badezet bremaig,
evid e dad hag e vamm, e taeron hag e vaeronez,
hag evid an oll dud a vev hirio war an douar.

Diskan: Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

Al lenner:

- 1-Evid ma plijo gand Doue digemer ar hrouadur-mañ en e Iliz
dre zakramant ar Vadiziant, pedom a greiz kalon....
- 2-Evid ma chomo 'hed e vuez fidel d'Or Zalver Jezuz Krist,
on eus merket sin e groaz warnañ, pedom a greiz kalon...
- 3-Evid ma heulio Jezuz Krist, o vervel d'ar pehed, ha ma'no
perz ive en e adsao a varo da veo, pedom a greiz kalon...
- 4-Evid ma kavo en e di, da heul karantez e dud, kenteliou ha
skoueriou mad evid e heñcha er vuez, pedom.....
- 5-Evid an oll gristenien a zo amañ, ma vleunio enno a-nevez
gras o badiziant, pedom a greiz kalon...
- 6-Evid oll gristenien ar b ed, diskibien da Jezuz, ma vevint
bepred unanet dre ar feiz hag ar garantez, pedom.....

Santez Mari, Mamm da Zoue,	℟. Pedit evidom.
Sant Josef, tad mager da Jezuz	℟. Pedit evidom
Sant Yann Vadezour...	℟. Pedit evidom.
Sant Pêr ha Sant Paol.	℟. Pedit evidom
Patron (ez) ar bugel	℟. Pedit evidom
Oll Zent ha Sentezed Doue..	℟. Pedit evidom.

III An ali da bedi gand ar beleg, evel d'an N° II

- 1-Evid ar hrouadur-mañ, ma plijo gand Doue e gemer e-touez e vugale,
Pedom....
- 2-Evid ma vo bepred, par d'ar skourr stag ouz ar winienn, unanet
gand Or Zalver dre ar feiz ha buez ar hras, pedom...
- 3-Evid ma chomo bepred e karantez Or Zalver ha ma vo gouest da rei
dirag an dud eun desteni mad evid ar feiz kristen, pedom...

4-Evid ma hello, gand gras Doue, mond beteg an eürusted peurbaduz,
pedom...

5-Evid e dad hag e vamm, e baeron hag e vaeronez, ma ouezint digeri
e spered hag e galon da anaoud ha da gared Doue, pedom...

6-Evid m'o devo an oll dud ar hras da zond d'ar feiz ha da veza
ganet a-nevez dre ar vadiziant , pedom...

... Da hounds , litani ar Zent.

IV

1-Evid ar hrouadur-mañ, ma plijo gand Doue, dre ar vadiziant, e
zigemer e-touez e vugale ha dond da veva ennañ, pedom....

2-Evid ma vo bepred, eur wech ganet euz an dour hag euz ar Spered
Santel, renet gand Spered Doue, ha ma vo gouest da rei dirag an
dud an testeni euz buez nevez eur hristen, pedom...

3-Evid ma vo gouest d'en em ziwall a-eneb an droug-spered, ha da
dehoud diouz kement tra a zoug d'ar pehed, pedom...

4-Evid ma lako oll nerz e galon hag e spered da gared Doue, ha
ma karo e nesa eveldañ e-unan, pedom...

5-Evidom ni oll a zo amañ, ma kavo ar hrouadur-mañ ganeom an testeni
euz or feiz hag or buez kristen, pedom...

6-Evid an oll gristenien, dezo da gaoud soñj o-deus resevet , en o
badiziant, ar merk euz-kroaz Or Zalver, ha da jom fidel dezañ,
pedom...

+++++

DA VENNIGA AN DOUR. (er mêz euz an amzer Fask-)

Bennoz ha meuleudi deoh, Aotrou Doue, tad oll-halloudeg, ho-peus
krouet an dour evid nêtaad hag evid rei ar vuez;

K. Meuleudi da Zoue ! (pe eun diskan all)

Bennoz ha meuleudi deoh, Salver Jezuz, Mab karet an Tad, ho-peus
lezet dour ha gwad da redez euz ho kostez, evid lakaad an Iliz
da veza ganet diwar ho maro hag hoh adsao da veo.

K. Meuleudi da Zoue !

Bennoz ha meuleudi deoh, Spered Santel, on Doue ive, ho-peus sakret
ha santelleet Or Zalver pa reseve ar vadiziant e dour ar ster Jordan,
evid ma vijem oll badezet ennoh.

K. Meuleudi da Zoue !

Deuit, Aotrou Doue, on Tad, da zantellaad an dour-mañ, bet krouet ganeoh; grit ma vo gwalhet euz o fehejou ar re a vo badezet ennañ, ha ma resevint ar vuez nevez a ray anezo ho pugale.

℟. Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

Kargit a zantelez an dour-mañ; grit d'an dud a vo badezet ennañ kaoud perz e maro Or Zalver hag en e adsao da veo, ha dond da veza patromou beo ho Mab.

℟. Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

(Ar beleg a douch an dour gand e zorn.)

Kargit a zantelez an dour-mañ krouet ganeoh, evid m'o-devo buez nevez dre ar Spered Santel an dud dibabet ganeoh da veza ho pugale, ha ma kavint o flas e-touez ho pobl santel.

℟. Aotrou....

Aotrou Doue, ema dirazoh (ar hrouadur-mañ) A..., galvet ganeoh ha douget gand e dud da reseo ar vadiziant e feiz an Iliz. Plijet ganeoh eta, dre vertuz kuzet an dour santel-mañ, digeri dezañ an nor d'ar vuez nevez a ro ar Spered Santel, evid ma vevo da viken.

℟. Amen.

DA VENNIGA AN DOUR, pe, ma'z eo benniget, DA DRUGAREKAAD DOUE.

Aotrou Doue, Tad madelezuz, bennoz ha meuleudi deoh, evid beza, da zeiz or badiziant, laket da darza ennom buez nevez ho pugale.

℟. Meuleudi da Zoue ! (pe eun diskan all)

Bennoz ha meuleudi deoh, rag, dre vertuz an dour hag ar Spered Santel, c'hwi a zastumm en eur bobl hebken an oll dud badezet e Jezuz Krist.

℟. Meuleudi da Zoue !

Bennoz ha meuleudi deoh, rag, dre ar Spered a zo hini ho karantez, skuillet en or halonou, c'hwi on laka distual hag a dorr on liammou, evid ma hellim tañva douster ho peoh.

℟. Meuleudi da Zoue !

Bennoz ha meuleudi deoh, c'hwi hag a zibab ho pugale badezet evid mond laouen dre ar bed a-bez da skigna kelou mad ar zilvidigez.

℟. Meuleudi da Zoue !

Digaset Aotrou Doue

Aotrou Doue, ema dirazoh (ar hrouadur-mañ) A... galvet ganeoh
ha digaset gand e dud da reseo ar vadiziant e feiz an Iliz.

Ma n'eo ket
benniget
an dour

Plijet ganeoh eta benniga + an dour-mañ hag e zantellaad,
ma resevo ennañ ar vuez nevez, ha ma vevo da viken.

℟. Amen

Ma'z eo dija
benniget

Plijet ganeoh eta, dre vertuz kuzet an dour santel-mañ, digeri
dezañ an nor d'ar vuez nevez a ro ar Spered Santel.

℟. Amen.

+++++

PENNADOU SKRITUR-ZAKR EVID AR VADIZIANT.

Da genta e vo kavet ar pennadoù Aviel lakeet er renk kenta er Ritual Latin, da houde, re all hag a zo erbedet ivez.

1-NI A DLE BEZA GANET A-NEVEZ:

Ar vuez a ra deom koaza hag ar pehed a ra deom koza.
Dre ar vadiziant ez om ganet a-nevez evid eur vuez ha ne vo diskar ebed dezi.
Deom kaoud eur yaouankiz nevez hervez spered an Aotrou Krist.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (3/ 1-6)

- 1-E touez ar Farizianed, e oa eun den anvet Nikodem, unan euz pennou braz ar Juzevien.
- 2-Dond a ra da gaoud Jezuz diouz an noz, hag e lavar dezañ:
"Mestr, gouzoud a reom ez eo a-berz Doue oh deut da gelenn an dud, rag den ebed n'hell ober ar burzudou a rit, ma n'emañ ket Doue gantañ."
- 3-Jezuz a respontas dezañ: "E gwirionez, m'hen lavar dit, den ebed, ma ne vez ket ganet a-nevez, ne hell gweled rouantelez Doue."
- 4-Ha Nikodem da lavared: "Med penaoz e hell eun den beza ganet pa'z eo deuet koz? Daoust hag e hell mond en-dro e kov e vamm evid beza ganet a-nevez?"
- 5-Setu respont Jezuz: "E gwirionez, m'hen lavar dit, den ebed, ma ne vez ket ganet a-nevez euz an dour hag ar Spered Santel, ne hell mond e rouantelez Doue."
- 6-Kement a zo bet ganet diwar an natur-den, n'eo nemed natur-denn, ha kement a zo bet ganet euz ar Spered, a zo Spered.

2-HARP E GAVOM EN AOTROU KRIST:

An aotrou Krist e-neus roet urz d'e ebestel da embann an Aviel.
Evid ma vefem gwir diskibien, fidel da bromesaou or badiziant, ema an Aotrou Krist dalhmad en or hichenn.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (28/ 18-20)

- 18-Tostaad a ra Jezuz ouz e ebestel, ha setu e gomzou:
"Roet eo bet din peb galloud en neñv ha war an douar."
- 19-It en hent, euz an oll vroadou grit diskibien din, roit dezo ar vadiziant en ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.
- 20-Ha deskit dezo mired kement tra am eus gourhemennet deoh.
ha setu emañ ganeoh 'hed an oll deizioù, (pe: bemdeiz)
beteg fin ar bed."

3-Bez 'EZ OM BUGALE MUIA-KARET EN TAD;

Bezom soñj, eme deom an Iliz, euz badiziant or Zalver.
Dre ar vadiziant e ra an Tad, ahanom oll, e vugale muia-karet.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (1/9-11)

9. En amzer-se e teu Jezuz euz Nazaret,
kêriadenn euz bro Halilea,
hag e oa badezet gand Yann e ster ar Jordan.
10. D'ar mare m'edo o tond er mêz euz an dour
e wel Jezuz enneñv o tigeri,
hag ar Spered Santel o tiskenn warnañ,
dindan fulm eur goulm.
11. Hag e oe klevet eur vouez euz an neñv:
"-Te eo va mab muia-karet,
ennout e kavan va dudí."

4-DOND DA VEZA HENVEL OUZ BUGALE

Karantez e-noa Jezuz ouz ar vugale; pokad a ree dezo hag o benniga.
Dre ar vadiziant, e kendalh da ziskouez dezo e garantez hag e houlenn
diganeom cheñch or halonou evid beza heñvel outo.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (10/13-16)

Jezuz hag ar vugaligou.

13. An dud a zigase bugaligou da Jezuz, evid ma touchfe outo,
med an diskibien o skandale.
14. O weled an dra-ze, Jezuz, droug ennañ, a lavar dezo:
"Lezit ar vugaligou da zond d'am haoud, na glaskit ket mired outo,
rag d'ar re a denn dezo eo rouantelez Doue.
E gwirionez, m'her lavar deoh:
15. An neb na zigemer ket rouantelez Doue evel ma ra eur hrouadur,
n'hello ket mond e-barz."
16. O hemer a ree etre e zivreh,
hag o benniga en eur lakaad e zaouarn warno.

5- KARED DOUE HA KARED ON NESA:

Jezuz a lavar deom e tleom deski d'ar vugale kared Doue ha kared o breu-
deur.
Deom-ni rei dezo skouer vad war ar poent-se.

35. Unan euz an doktored war al lezenn a ra ar goulenn-mañ:
ouz Jezuz evid klask e luzia.
36. "Mestr, pehini eo ar brasa euz ar gourhemennou el lezenn ?"
37. Jezuz a respont:
- "Kared a ri an Aotrou, da Zoue, euz a greiz da galon,
gand da oll ene ha da oll spered.;
38. Henez eo ar brasa hag ar henta euz ar gourhemennou
39. hag an eil a zo par dezañ:
kared a ri danesa evel d'out da-unan.
40. D'an daou gourhemenn-ze,
e teu kement a zo er skritur,
en Lezenn hag er brofeted.

6-AR GOURHEMENN BRAZ: KARED DOUE HAG KARED ON NESA:

Kared Doue euz o oll nerz ha kared an nesa evel m'e-neus greet or Zalver,
setu ar pezh a dle ar vugale klask ober a-hed o buez.
Deom-ni d'o zikour da zond a-benn.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (12/ 28 b-34 a) Krennet 12/28 b 31

28. En amzer-se, unan euz ar skribed a dosta ouz Jezuz, da houlenn outañ:
"Pehini eo ar henta euz ar gourhemennou ?"
29. Respont a ra Jezuz:
"An hini kenta eo hemañ:
Selaou, Israel: an Aotrou eo on Doue, ha n'eus Aotrou all ebed;
30. Kared a ri an Aotrou, da Zoue, a-greiz da galon,
gand da oll ene, da oll spered ha da oll nerz.
31. Hag an eil eo hemañ: Kared a ri da nesa evel d'out da-unan.
N'eus ket brasoh gourhemenn eged ar re-ze."
32. Ar skrib, neuze, a lavar dezañ: "Mad-tre, Mestr!"
Gand gwirionez ho-peus lavaret
ez eus eun Doue hebken, ha n'eus hini ebed nemetañ;
33. Kared anezañ a-greiz kalon, gand an oll spered hag an oll nerz,
ha kared an nesa evel d'out da-unan,
a dalv muich eged an oll brovou ha sakrifisou."

7-MA OUFENN DONEZON DOUE:

Dour on-eus ezomm evid beva;

Er vadiziant e ro Doue deom eun dour hag a rajo deom beva evid atao.

Gantañ, mui a zehed, mui a varo, med ar vuhez o tarza heb ehan.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (4/7-14-)

Jezuz a zo azezet war bord eur puns, tost d'eur gêr anvet Sikar.

7-Dond a ra eur vaouez, euz tud Bro-Zamaria, da gerhad dour;

Jezuz a lavar dezi:

-Roit din da eva.

8-Rag e ziskibien a zo eet e kêr da brena boued.

9.Ar zamaritaneez a lavar dezañ:

-Penaoz ! c'hwi eo Yuzeo,

a houlenn da eva diganin-me eur Zamaritaneez ?

Ne vez ket a zarempred etre ar Yuzevien ha tud Bro-Zamaria.

10-Jezuz a respont dezi:

-Ma anavezfeh donezon Doue,

ha ma ouifeh piou 'zo o lavared deoh : Roit din da eva,

c'hwi eo, moarvad, a houlennfe digantañ,

hag eñ a rofe deoh dour beo.

11-Ar vaouez a lavar dezañ:

-Aotrou, n'ho-peus netra evid tenna dour,

hag ar puns a zo don;

eus peleh'ta ho-pevez an dour beo-se ?

12-Ha brasoh e vefeh-c'hwi eged on Tad Jakob,

e-neus roet deom ar puns-mañ

hag e-neus bet evet dioutañ.

eñ hag e vugale hag e loened ?

13. Jezuz a respont dezi:

-An neb a ev euz an dour 'zo amañ, e-np sehed c'hoaz;

med an neb a evo euz an dour a roin-me dezañ,

n'e-no sehed mui da viken;

14.An dour a roin dezañ a zeuio da veza ennañ eur vammenn,

hag a darzo an dour anezi,

evid ar vuez peurbaduz.

8-SELAOUOM AN TAD:

Ar feiz a zo eun donezon a-berz Doue.

Red e vo deom sikour ar vugale-mañ da zelaou komz Doue evid m'o-defe ar gwir vuez.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (6/44-47)

Jezuz a lavare:

44-Nikun ne heñl dond davedon, nemed ha sachet e ve gand an Tad e-neus kaset ahanon, ha me'zavo anezañ da veo d'an deiz diweza.

45.Skrivet eo er brofeted: Oll e vezint kelennet gand Doue.
Kement-hini e-neus selaouet an Tad ha resevet e gelenadurez a zeu davedon.

46.N'eo ket e-nefe nikun gwelet an Tad, nemed an hini a zo a Zoue;
hemmez hebken e-neus gwelet an Tad.

47.E gwirionez, e gwirionez, m'hen lavar deoh,
an hini e-neus feiz ennon e-neus ar vuhez peurbaduz.

9-AN DOUR A RO DEOM AR VUHEZ:

An dour a dorr ar zehed, distana a ra, rei a ra eur vuez nevez.
Badezet en dour, deom-ni bremañ da veva euz eur vuez nevez hervez Spered
or Zalver.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (7/ 37 b-39 a)

37.D'an deiz diweza, en hini brasa euz gouel an Teltou,
edo Jezuz, en e zav, e templ Jeruzalem hag e lavaras:
"an neb e-neus sehed, dezañ dond d'am haoud,
hag an neb e-neus feiz ennon, dezañ dond da eva."

38.Evel ma lavar ar Skritur Zakr:
euz e greiz e tarzo steriadennoù dour beo.

39.Kement-se a lavare euz ar Spered Santel.

10-A-BERZ OR ZALVER E TEU DEOM AR SKLERIJENN:

N'eo ket êz deom gwelad sklêr er pezh a dremen ennom hag endro deom.
Jezuz e-neus lavared:" Me eo sklerijenn ar bed.
Ganin-me ne gerzoh ket en deñvalijenn."

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (9/1-7)

1 En amzer-se, Jezuz a oa eet da Venez an Olived.

2-Kerkent ha goulou-deiz, ez eo deuet en-dro d'an Templ,
hag an dud a zirede oll d'e gavoud.
Jezuz, azezet, a gelenne anezo.

3 Ha setu ar skribed hag ar Farisianed a zigas dirazañ
eur vaouez bet tapet oh ober avoultrij;
lakaad a reont anezi e-kreiz, dirag an oll,

4-Hag e lavarent da Jezuz: "Mestr, setu amañ eur vanuezh
a zo bet tapet oh ober avoultrij."

5-El lezenn Moizez e-neus gourhemennet deom laza a daoliou mein
ar seurd merhed-se. Ha c'hwi, petra 'lavarit?"

6-Evelse e komzent evid e baka, dezo da gaoud tro d'e damall goudeze.
med Jezuz, daou bleget, a skrive gand e viz war an douar.

7.O veza ma talhent d'ober goulennou outañ, e sav e gein hag e lavar dezo:
"An hini ahanoh a zo dibeh, dezañ ar henta da daoler mein outi."

11-IMBOUDET(GREFET) OM WAR AN AOTROU KRIST:

Or Zalver eo ar winienn wirion, imboudet om warnañ, ahano e teu deom buez
Doue.

Heptañ, n'hellom ket dougenn frouez.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT Y'ANN (15/1-11)

Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad,
Jezuz a lavare d'e ziskibien:

- 1- "Me eo ar winienn wirion, ar gwiniennour eo va zad.
- 2- Kement skourr ennon na zougo ket a frouez a vo trohet kuit gantañ,
ha kement hini a zougo frouez a vo gantañ nêteet ha krennet,
evid ma tougo muioh.
- 3- C'hwi, adal bremañ, a zo nêt, ablamour d'ar homzou am-eus lavaret deoh.
Chomit ennon, ha me ennoh.
- 4- Ne hell ket eur skourr dougen frouez dre e-nerz e-unan;
evelse, na c'hwi kennebeud, ma ne jomit ket stag ouzin.
- 5- Me eo ar winienn, c'hwi ar skourrou.
An hini a jom ennon, ha me ennañ, hennez a zoug kalz frouez,
rag, distag diouzin, n'hellit ober netra.
- 6- An neb na jom ket stag ouzin a vo stlapet kuit,
evel ma reer d'eur skourr, hag a zeho,
a vo dastumet, da taolet en tan ha devet.
- 7-Ma chomit stag ouzin ha ma chom va homzou ennoh,
houlenit ar pezh ho-po c'hoant, hag e vo roet deoh.
- 8- Kement-mañ eo a zavo gloar d'am Zad: ma tougit frouez e-leiz
ha ma vezit diskibien din
9. Evel me-neus va Zad karet ahanon, me ivez am-eus ho karet.
Chomit em harantez.
- 10- Gand ma heuliot va gourhemennou, e chomot em harantez,
evel ma heulian-me gourhemennou va Zad
hag e choman en e garantez.
- 11- Kement-se am-eus lavaret deoh, evid ma vo valevenez ennoh,
ha ma vo peur-leun (pe: leun-barr) ho levenez.

Gwad ha dour a zo tarzet euz kalon an Aotrou Krist e kroaz.
E varo eo e-neus or gwalhet euz or pehejou ha saveteet ahanom euz ar
maro ha ne vo fin ebed dezi.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (19/31-35)

En amzer-se, da wener ar groaz,

31-o veza ma oa derhent ar zabbad,
evid ma jomfe ket ar horvou ouz ar groaz da zeiz ar zabbad,
rag eur gouel braz e oa ar zabbad-se,
ar Juzevien o-deus goulennet digand Pilat ober terri dezo o divesker
ha lemel kuit o horvou.

32.Dond a ra ar zoudarded eta, ha terri a reont e zivesker d'an hini kenta,
ha goudeze d'ane eil a oa bet staget ouz ar groaz e kichen Jezuz.

33-Med, p'en em gavont gand Jezuz ha pa welont ez eo maro,
ne dorront ket dezañ e zivesker.

34.Unan avad euz ar zoudarded, gand eun taol lañs (pe: goaf)
a zigor dezañ e gostez, ha kerkent e red gwad ha dour dioutañ.

35-An hini e-neus gwelet a ro testeni a gement-se, ha gwir eo e desteni.
hag hennez a oar e lavar ar wirionez,
evid m'ho pezo feiz, c'hwil ivez.

13-Ma ON-DEFE FEIZ !

Doue a zo en on touez.

An Hebreed, en dezerz, a zañje dezo edo Doue pell diouto hag a lezfe
anezo da vervel gand ar zehed.

Ha ni ? ha kredi a reom ema aze evid rei deom, dre ar vadiziant, dour
evid ar vuez ha n'eus fin ebed dezi ?

LENNADENN EUZ LEVR AN EXOD (17/3-7)

3-En deizioù-se, emañ Pobl Israel o tarza gand ar zehed, dre ziouer a zour,
hag an dud a glask trouz ouz Moizez,
o lavared dezañ:

-Perag ho peus gret deom kuitaad Bro-Ejipt,
evid ober deom mervel gand ar zehed,
ni hag or bugale, hag on loened?"

4-Moizez a zav kreñv e vouez warzu Doue:

-Petra 'rin evid ar bobl-mañ ?

Dare int d'am laza a daolioù mein."

5-An Aotrou a respont da Voizez:

-Tremen dirag ar bobl, kemer ganit lod euz tud koz Izrael,
lak en da zorn ar vaz a oa ganit evid skei gand ar ster en
Ejipt,

ha kerz war raog !

6-Me 'vo du-ze, dirazout, a-zioñ ar roh e Menez Horeb;
Te a skoio gand ar roh, hag e strinko dour anezi,
d'ar bobl da eva."

Evelse, penn-da-benn e-neus grêt Moizez, dirag tud koz Israel.

7-Hag e-neus anvet al leh-se Massa(=amprouadenn) ha Meriba (=tabud),
ablamour m'o doa tud Israel klasket trouz outañ,
hag amprouet an Aotrou, pa lavarent;
-Daoust hag emañ an Aotrou ganeom, pe n'emañ ket ?"

14-EUR GALON NEVEZ A RAO DOUE DEOM:

Ablamour d'ar pehed e vez aliez or halonou kaled evel ar mên, dihalloud
da gaoud karantez. Er vadiziant, an Aotrou Doue a ro deom eur galon
nevez, gouest da gared evelañ.
Evelse e ra deom beza euz e bobl.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED EZEKIEL (36/ 24-28)

Evel-henn e komzas ouzin an Aotrou Doue:

24-Ho tenna a rin euz a-douez ar broadou
hag ho tastum euz an oll vroioù,
ho tigas a rin endro d'ho pro.

25-Skuill a rin warnoh dour glan, hag e vezoh glaneet;
euz ho oll saotraoù, euz hoh oll draou faoz
me ho tizaotro.

26-Eur galon nevez a roin deoh, eur spered nevez a lakin ennoh.
Lemel a rin euz ho kreiz ar galon kalet, hag e roin deoh eur galon dener

27.Va spered a lakin en ho kreiz,
hag e rin deoh beva hervez va lezennoù,
mired va gourhemennou hag o heulia.

28-Mond a reoh da jom d'ar vro am-eus roet d'ho tadou,
c'hwi a vo va fobl, ha me a vo ho Tour.

15-BEUZET OM EN AOTROU KRIST:

Ar vammenn a zour beo eo Jezuz.
Dre ar vadiziant e teu da nêtaad, de derri ar zehed, da lakaad ar vuez
da darza.
Dija ar profed Ezekiel a denne ano euz ar vammenn veo-se, o tend er mêt
euz an Templ, skeudenn an Iliz.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED EZEKIEL (47/ 1-9,12)

E-kerz eur weladenn bet din a-berz Doue,

1-An den am rene a gasas ahanon endro da zor an Templ,
ha setu: euz a zindan treuzou an Templ,
an dour a darze war-zu ar zav-heol,
peogwir edo talbenn an ti diouz kostez ar zav-heol.

An dour a ziskenne euz tu dehou talbenn an Templ
hag a dremene er su euz an Aoter.

2. An den a reas din mond er mēz dre ar porched nord
hag a reas din ober an dro dre an diavêz
beteg ar porched a sko war ar zav-heol,
hag aze adarre e rede an dour diouz an tu dehou.

3. An den a droas war-zu ar zav-heol
eur walenn-vuzula en e zorn,
hag e vuzulas 'hed mil ilinad;
neuze e reas din treuzi an dour;
beteg va uvernious ez ee e barz.

4. Muzula a reas c'hoaz 'hed mil ilinad- , hag ober din treuzi;
beteg daoulin am-baa.
Muzula a reas c'hoaz 'hed mil ilinad, hag ober din treuzi;
beteg an diou-groazell am-baa.

5. Muzula a reas c'hoaz mill all:
bez' e oa eur froud ha n'hellen ket treuzi,
rag kresket e oa an dour hag em-befe ranket neuñv;
eur froud e oa ha n'helled ket treuzi.

6. Neuze e lavaras din:
-"Gweled a rez, mab-den ?"
va las a reas gantañ ha va digas endro war ribl ar ster.

7. Hag en distro, setu ar pezh a oa war ribl ar ster:
diouz an daou du, gwez e-leiz.

8. Hag e lavaras din:
"An dour-se a red war-zu korn-bro ar zav-heol,
diskenn a ra e traonienn ar Jordan
evid koeza er Mor Maro,
ha yahusaad an dour ennañ.

9. E kement leh ma'z aio dour ar ster,
an oll anevaled a hello beva ha kreski;
stank e vo ar pesked
rag an dour-se a yahusa kement tra 'za ennañ.
ha diwana 'ra buez e kement leh ma'z a ar ster.

10. War ribl ar ster, diouz an daou du,
e savo a beb seurt gwez-frouez,
ne cenvo ket o deliou
ha ne vanko ket a frouez warno.

16-GALVET OM DA VEVA EUZ EUR "VUEZ NEVEZ":

Ar vadiziant a ra deom mervel d'ar pehed ha trei kein da gement a
gas d'ar pehed.
Euz an deñvalijenn e tremenom d'ar sklerijenn gand or Zalver Jezuz Krist.
Sebeliet a-unan gantañ eh antreom er vuez.

3-Va breudeur, her gouzoud a rit, ni oll hag a zo bet badezet,
er Krist ez om bet badezet.

4-Sebeliet om bet a-unan gantañ, dre ar Vadiziant en e varo,
evid ma teufem da ren ni ivez eur vuez nevez,
evel ma'z eo adsavet da veo an Aotrou Krist, dre halloud skeduz an Tad.

5-Rag, mar dom deuet da veza unan gantañ dre eur maro heñvel ouz e hini,
e vezim ivez unan gantañ dre eun adsao da veo heñvel ouz e hini.

17-GALVET OM D'AR HLOAR:

Dre ar vadiziant e laka Doue ahanom e renk e vugale.
Deuet da veza breudeur d'er Zalver Jezuz Krist, ez om salvet drezañ ha
galvet da hloar an neñvou.
Deom-ni, dre or buez, da veza din euz eur seurt madelez.

28-VA breudeur, evid an dud a gar Doue
ni 'oar e tro peb tra evid o mad,
o veza m'int bet galvet hervez e venoz a garantez.

29.O anavezet e-neus a oll viskoaz,
hag o dibabet da zond da veza heñvel ouz e Vab,
evid ma vo hemañ ar henta euz kalz a vreudeur.

30-Ar re e-neus dibabet, e-neus ive galvet (d'ar feiz)
ar re e-neus galvet, e-neus grêt anezo dibeh;
hag ar re e-neus grêt dibeh, e-neus roet dezo e hloar.

31-M'ema Doue ganeom, piou a vo a-eneb deom ?

32-N'e-neus ket damantet d'e Vab dezañ e-unan,
roet e-neus anezañ evidom oll:
penaoz, gand e Vab, ne rofe ket deom peb tra ?

18-NE REOM, GAND AN AOTROU KRIST, NEMED EUR HORV HEBKEN;

An Iliz a zo heñvel ouz eur horv m'eo or Zalver ar penn anezañ.
Ni oll, tud vadezet, izili euz ar horv-se, a zo unanet an eil gand
egile dre ar Spered a garantez.

12-Da skouer, lakom ar horv, a zo anezañ eur horv hebken;
kalz a izili (pe: memprou) e-neus koulskoude,
med an oll izili, kaer o-deus beza niveruz,
n'eus anezo nemed eur horv.
Evelse ivez (ema kond gand) an Aotrou Krist.

13-Rag en eur Spered hebken om bet badezet
da veza , ni oll, eur horv hebken,
koulz ar Yuzevien ha poblou all, koulz sklavourien ha tud libr,
oll eo bet torret deom or zehed diwar ar Spered n'eus nemetañ.

19-DEOM-NI STARTAAD AN UNANIEZ ETREZOM:

Mab Doue a zo en em hreet den evid ma teufem da veza bugale da Zoue.
Or Zalver a zo en em hreet breur deom evid ma teufem da veza unanet evel
breudeur.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR HALATED 3/26-28

26-Va breudeur, c'hwi 'zo oll breudeur e Jezuz Krist,
bugale da Zoue dre ar feiz.

27-Rag c'hwi oll, pa 'zo eo bet roet deoh badiziant an Aotrou Krist,
a zo warnoh dremm an Aotrou Krist.

28.N'eus mui ano euz Yueo ha payan,
euz sklavour ha den libr, euz gwaz ha maouez,
peogwir n'hoh nemed unan c'hwi oll er Zalver Jezuz

20- N'ON-EUS NEMED EUR MEMEZ FEIZ:

Badezet, ni a zo galvet da gaoud ar memez feiz, peogwir ez om bugale d'ar
memez tad.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AN EFEZIANED 4/1-6

1-Va breudeur, hoh alia stard a ran,
me hag a zo er jadennou ablamour d'Or Zalver,
da heulia en ho puez an hent a zigouez deoh(pe: a zere ouzoh)
goude m'oh bet galvet d'ar feiz gand Doue.

2-Bezit atao izel a galon, leun a zouster hag a basianted,
en emhouzañvit an eil egile gand karantez.

3-Lakit ho poan da vired an unvaniez, frouez ar Spered,
pa'z eus etrezoh liamm ar peoh.

4-Eur horv hag eur Spered hebken a zo,
kenkoulz ha m'oh bet galvet d'eun esperañs hebken.

5-N'eus nemed eun Aotrou Krist, eur feiz, eur vadiziant,

6-Eun Doue, Tad an oll, hag a zo dreist an oll,
e touez an oll, hag e diabarz an oll.

